

Histoire de Jérusalem ; Vincent Lemire – Christophe Gaultier (kinniget get Padrig)

Amprestet get Padrig e ti e dud ; ur vandenn dreset eo, aes da lenn, hag a ziskouez mat istoer hir Jeruzalem hag ar stourmoù evit ar galloud a-hed troioù ha distroioù an istoer, an darempredoù etre ar relijionoù a bep sort, memoar an dud, ha tout ar merkoù laosket get an traoù-se e tier, geografiezh, neuz ar gêr-se.

Jarl Priel (kinniget get Christian)

Jarl Priel (1885-1965) a oa anv pluenn Charles Tremel, ganet e Priel, e Bro Dreger. Ur vuhez dispar en deus bet hag e envorennoù en deus skrivet e e korf tri levr, war un ton fentus ha flemmus. Desket en doa brezhoneg get e vamm gozh, ha ne ouie ket galleg. Martolod eo bet er morlu, kelenner e Bro Rusia, jubennour evit ur rejumant rus war an dalbenn e Bro C'hall e brezel bed kentan, hag ar rejimant kaset da vro Aljeria po doa savet ar soudarded ur « soviet » e 1917... Jarl Priel doa labouret evit servijoù kuzhet Bro C'hall, hag ivez evit arzourien evel Louis Jouvet ha Charles Dullin. Pezhioù c'horiz zo bet skrivet getan. Adembannet eo bet e envorennoù get An Alarc'h embannadurioù. Ur yezh saourous met a c'hell bout diaes da gompren a wezhoù... N'eo ket gwenedeg ! 563 pajenn. 20 euro.

Azincourt par temps de pluie (kinniget get Christian)

Un doare kentel istoer eo al levr skrivet get Jean Teulé (skrivagner marv ar blez paseet, siwazh). Met treset get fent ha flem. Diskouezh a ra pegen sot a oaan noblansed uhel hag a oa e penn arme roue Bro C'hall, er blez 1415, hag a faote dezhe mont d'an emgann a enep roue Bro Saoz, Henri V. Kalz niverusoc'h ha krenvoc'h oa arme Bro C'hall, met trec'het get ar re saoz, daoust dezhe bout klanv ha kalz nebeutoc'h. Penaoz, perak ? Lennit al levr se, 220 pajenn, fentus, kentelius, deverrus. Embannet get J'ai lu, 7,20 euro.

Tokyo Vice (Jake Adelstein), embannet get Points (kinniget get Greg)

Un istoer du-mat e bed ar mafia e bro Japan, e Tokyo, get sell lemm ur c'hazetenour hag a glask penn d'an afer-se ; mes en arvar emañ dre ma lak an dorfedourion gwask àrnoñ. Splujadenn e bed ar polis hag ivez splujadenn sevenadurel er Japan a-vremañ.

Baya ; femmes en leur jardin (kinniget get Annette)

Ur levrad taolenoù livet get Baya, un aljerianez bet ganet e 1931 ha marvet er blez 1998, hag a live un tamm mod ma ra ar vugale, taolenoù lan a livoù é tiskoueziñ merc'hed, jardinioù, evned, benveger sonerezh...

Plant ar vro Il (Jo Tangi), embannet get Al Lanv (kinniget get Padrig)

Eil lodenn ar levr-se hag a gomz a blantenoù ar vro, deskrivet bep taol àr ur bajenn zoubl get fotoioù brav graet get an aozer. Hag anvioù brezhonek evit pep plantenn. Labour brav zo bet graet evit tolpiñ an anvioù-se get Roland Mogn hag e lec'hienn Plantkelt, da skouer, met bremañ emañ rekis implijout an anvioù-se ha marse o renkiñ en ur mod skianteloc'h c'hoazh.

Arnodva an hadennoù (TES) (kinniget get Padrig)

Ur levr livet-kaer get tresadennoù fentus met komz a ra a draoù grevus : ar c'hleñvedoù-red spontusañ a zo er bed, penaos e vezont strewet a zen da zen, get virusoù, bakteri pe me oar-me ; hag istoer ar skiantourion o deus kavet an hadennoù-se ha desket deomp penaos en em warantiñ doc'hte. Troet diàr ar saozneg. Savet kentoc'h evit ar vugale hag ar re yaouank met kentelius-mat evit an dud vras ivez !